

Pronost Per (Trelez 1861 – Brest 1909)

Annaig : bet embannet e 1902.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Goulenn a ra Pronost ma vefe skrivet brezoneg reiz. Daoust da ze e ra gand “pehini”, “pere” e-leh “an hini”, “ ar re”, ha gwechou ‘zo e vez akordet gantañ ar verb gand e rener.

Faziou kemmaduriou a ra aliez. Reizet int bet.

Galleg eo e ereadurez meur a wech.

E-barz **Annaig** e ouel dibaouez pa’z eo maro an hini a gare.

TAOLENN

Ar Gonideg
Kinnig
Kenvroiz ker euz Leon

ANNAIG

Annaig
Son
Deu
Son
War vor
An teodou fall
Hanternoz
Egile
Merzererez
Anken
He maro santel
War an aot
Eun abardaez a viz Mae
He boked diweza
Heh ano
Amzer dremenet
Tristidigez
Ar gwir vro
Dilezet
D'heh ene
Va-unan
D'an dud hep kredenn
Er vered
Lireuenn he bez
Goude va maro
D'am zelenn

*Bevet AR GONIDEG !
Reizer ar Brezoneg ;
Dalhom, a wir galon,
Euz TROUDE ar soñjezon.*

KINNIG

Al levr-mañ a ginnigan d'am zad, d'am breudeur ha d'am c'hoarezed ; re ziwezad on, siwaz ! d'her hinnig d'am mamm ger an hini¹ or gortoz oll er Baradoz.

Her hinnig a ran, ohpenn, d'an Aotrou A. LE STUM en-deus bet ar vadelez da rei din an dorn evid skriva an toniou a zo ennañ, ha d'an Aotrounez F. VALLEE (ar barz Abherve), F. JAFFRENNOU (ar barz Taldir), ar re² a zivenn ken nerzuz or yez, en eur mare ma klasker, dre beb ardou, he disgwrizienna euz Breiz-Izel.

Per PRONOST.

KENVROIZ KER EUZ LEON

Poent braz eo d'ar Vretoned a fell dezo e chomfe o yez beo, enebi ouz ar geriou divrezoneg a deu, nebeud-ha-nebeud, d'en em ruza en or yez, en eur vouga ar gwir vrezoneg.

Daoust ha ne glevit ket bemdez, en-dro deoh, geriou evel ar re-mañ : parlant – kaozeal – jamez – pousier – kontantamant – vizach – sertenamant – koler – joa – uzach – posubl – komprenn ?...

Nag a bed kant ger evel-se a hallfem da lakaad dirag ho taoulagad !

Geriou brezoneg gwirion on-eus, heb kaoud ezomm euz ar geriou nevez-se, ha labour fall a ra³ ar skrivagnerien o laka en o skridou, war digarez eo deuet ar hiz da gomz evel-se.

Dre ar hazetennou, al levriou, ar gwerziou, ar zoniou, eo e teuim a-benn da zegas a-nevez ar hiz euz ar gwir vrezoneg.

Skrivagnerien, room eta an dorn an eil d'egile evid enebi ouz an enebour.

D'ar barz eo da zigeri an hent.

Med n'eo ket a-walh lezel a-ziaskren ar geriou divroad gwisket e brezoneg, oh eun enebour all ar barz a dle c'hoaz herzel.

Ral e kaver eur barzoneg êz a-walh da lenn ha da gleved, rag kazi e peb leh e weler vogadell oh vogadell (hiatus) pe eun hanter re a heriou mahagnet dre ar virgulenn uhel (apostrophe).

Klasket em-eus el levrig-mañ enebi gwella ma hallen ouz an daou enebour braz-se d'or yez ; plijet gand Doue e teuy kement barz yaouank da ober atao gwelloh-gwella, evid brasa mad an teod hag ar skouarn ha, dreist-oll, evid diskouez n'eo ket ar brezoneg ken rust ha ma hen lavar kalz a dud, dre warizi avad, peurliesha.

Per Pronost.

¹ an hini : "pehini" er skrid orin.

² ar re : "pere" er skrid orin.

³ a ra "a reont" er skrid orin. Akordi a ra ar verb gand e rener.

ANNAIG

Ar bokejou glasa, digor er prajou braz,
N'o-deus ket al liou kaer euz he daoulagad glaz :
Ne weler ket gwiniz, en hañv, e nep tachenn,
Alaouret, stank hag hir, evel he bleo melen :
Iskiz⁴ ha dudiuz eo kan an alhwedez⁵,
Kalz dudiush c'hoaz eo mouez va mignonez.

⁴ Iskiz : (notenn gand Pronost) : Iskiz a dle beza degemeret amañ evel ar ger galleg "extraordinaire".

⁵ an alhwedez : an alhweder (evdi ar rim ?)

SON

E-kichenn eur menez
Ez eus eul lojennig ;
Pegement eo koantig !
Nag a beg gwech, en deiz,
Evid mond beteg hi⁶,
Me 'gemer an hent striz
A ya da zor an ti.

DISKAN

Evid gounid kalon
Va Dousig koant ha ker,
Piou 'zesko din eur zon
Dudiuz ha tener ?

Hogen me 'jom atao,
A-dreñv d'ar harz, kuzet,
Ha dond a ran en-dro,
Heb beza bet gwelet ;
Petra 'ra din eta
Ken aliez koll amzer ?
Perag huanada,
Heb lavared eur ger ?

Siwaz ! el lojennig
Ema va harantez,
Hag ar gaerra plahig
Em-eus gwelet em buhez ;
Hag a-greiz va halon
Ken gwirion he haran,
Ma choman mud, gand aon
Na⁷ lavarfe din : nann !

⁶ beteg hi : beteg anezi.

⁷ Na : "Ne" er skrid orin.

DEUS

Deus, ar mêziou 'zo kaer evel evid eur gouel,
Al laboused, ohpenn, n'ehanont ket d'az kervel,
Adaleg ar mintin, da vond en o hoajou
Evid meski da vouez gand o hanaouennou.
Deus, rag en eur huñvreal, eüruz ni yelo
A-hed ar wenodenn, e-skeud ar gwez dero.
An amzer a zo klouar hag a-boan an deliou,
Gand an avelig sioul, a gren oh o skourrou ;
E yeot ar prad ar bleun a zo digor brema'
Hag an dour-red a ruill, en eur huanada ;
Dindan eun heol skeduz e lugern ar mor braz
Hag a-boan ma klever trouz an houll war an treaz⁸.
Evidom en-deus Doue greet an nevez-amzer,
Evidom an Neñv glaz hag ar mêziou ken kaer,
Degemerom eta laouen e deñzoriou
Ha lezom da dridal, meurbed, or halonou.
Deus, va muia-garet⁹, deus oh breh da vignon,
Deom el leh ma kari lakaad da zoñjezon,
Me 'fell din war da dal, e-giz eur gurunenn,
Skoulma bokejou glaz e-touez da vleo melen.

⁸ an treaz : "an trêz". Stumm Leon, evid ar rim.

⁹ va muia-garet : "va muia-karet" er skrid orin.

SON

War don : *La brise est douce et parfumée* (e-barz "Mireille").

Annaig, du-hont, gwel an einigou¹⁰,
Er yeot tener leun a vokejou,
O taoulammed er prajou glaz ;
Deveziou kaer an nevez-amzer
 A zistro c'hoaz,
Ha kan al laboused a glever
 Er hoajou braz.

Koantig e c'hoarz¹¹ ar bokejou
Digor-braz a-zindan an Neñvou
Digohenn, lugernuz ha glaz ;
Gand eur vouez skiltr ar grilled a gan
 O zon ken freaz¹²,
En eur redeg e-touez ar balan,
 El lannou braz.

Daoust ha ni, gwir vugaligou Doue,
Ne hallom ket ivez beza gae,
Pa'z eo pep tra laouen er-meaz¹³ ?
Breh-oh-breh, deom eta, laouen-oll,
 Er hoajou braz,
Evid en em gared e disheol
 Eur vodenn hlaz.

En em garom mad, rag er bed-ma'
Daoust ha n'eo ket on amzer gaerra
Pa n'on-eus nemed c'hwezeg vloaz ?
Bezom oll e levenez, hirio,
 Gand aon, siwaz !
Na deufe falh trubard ar maro
 D'on skei, warhoaz.

¹⁰ an einigou : "an oanigou" er skrid orin.

¹¹ e c'hoarz : "e c'hoarzon" er skrid orin. Akordi a ra Pronost ar verb gand e rener.

¹² freaz : "frêz". Stumm Leon evid ar rim.

¹³ er-meaz : er-mêz.

WAR VOR

Gwel ar mor o lintri
Dindan eun heol skeduz ;
Em bag skañv e vezi,
Annaig, ken eüruz !
N'ez eus ket en neñvou
An disterra koabrenn,
Heb aon 'ta, deom, on-daou,
'Vid ma kanin laouen :

DISKAN

Va bag, dalh eun devez
Da ouel gwenn digor,
Ha lusk va mignonez
War mor an Arvor.

Lezom an teodou fall
Da gomz, hervez o giz :
Or hredenn on diwall,
Kemerom or frankiz ;
Gand ma vim, dirag Doue,
Direbech da-viken,
E hallom beza gae,
Hag e kanim laouen :

Va bag, dalh eun devez
Da ouel gwenn digor,
Ha lusk va mignonez
War mor an Arvor.

O ! lez war da gened
Da bara va zellou,
Ken e teuio¹⁴ ar stered,
D'ar pardaez, en neñvou,
Gand aon n'em-befe ket
Devez all ebed ken,
Er bed-mañ, d'az kared,
Ha da gana laouen :

Va bag, dalh eun devez
Da ouel gwenn digor,

¹⁴ e teuio : "a steuint" er skrid orin. Fazi yezadur.

Ha lusk va mignonez
War mor an Arvor.

AN TEODOU FALL

An teodou fall o-deus greet o labour euzuz ;
Annaig, ne hallim mui, siwaz ! en em weled ;
O ! na perag ar fall, o ! tra ken sebezuz !
Kentoh eged ar mad, a vez atao kredet ?

Ne hallim kleved mui da vouez ken dudiuz !
Lenn en da zaoulagad a werhez, ar hlanded ;
Hiviziken me dle, dilezet hag e-kuz,
Gouzañv sioulig ar boan greet d'am halon rannet.

Med an dud kriz a hall euz va gwalleur c'hoarzin,
Euz ar mintin d'an noz, euz an noz d'ar mintin,
Gand o zaoliou trubard, kreski c'hoaz va gouli ;

Gand ma ouezin ez out eüruz 'vel eun Êl,
Gand ma vo da galir, atao, leun-oll a vel,
E haller, heb ehan, skuilla bestl, em hini.

HANTERNOZ

Hanternoz 'zo sonet en on iliz-parrez ;
Er mêziou sioul al loar a skuill he sklêrijenn ;
Daoust ha sioulig ivez e kousk va mignonez ?
Euz va frenest me wel, er sklêrder, he lojenn.

Evidon-me, siwaz ! gwasket gand an enkreuz,
Ne hallan ket mori, kement em-eus terzienn !
Peogwir en or heñver he herent 'zo didruez,
Evid skriva dezi ma kemerfen va fluenn ?

O nann !, rag pa zoñjan eo rannet he halon
Gand on disparti griz, e krenan, em-eus aon
Da greski c'hoaz he foan, o tiskuill va glahar.

En da lojenn, Annaig, kousk sioulig 'hed an noz ;
Diskennit euz an Neñv, Êlez ar Baradoz,
D'astenn ho tiouaskell war Êl dinamm an douar.

EGILE

Gouzoud a ran bremañ perag va harantez,
Ken gwirion koulskoude, n'eo ket bet selaouet ;
En on amzer ken fall, heb ar binvidigez,
Ar galon denerra n'eo ket anavezet.

En despet d'az klahar, Annaig, va mignonez,
Da gerent a ra fae war da vuia-karet ;
Pa gavont eru pennher, gand kemend a zanvez !
Daoust hag euz da galon ar vouez te 'dle kleved ?

Heb fazi, ma welan e halli koulskoude,
Heb ranna da galon, kemered ar pried-se,
'Vid d'az lezel e peoh, diouzit me gimiado.

Med penaoz e hallin, med penaoz e halli
Beva c'hoaz er bed-mañ, war-lerh on disparti ?
Evidom, a gredan , 've gwelloh ar maro.

MERZEREREZ

He herent a vezo kastizet hebdale
Da veza bet, siwaz ! ken kriz en he heñver ;
Annaig a goll bemdez he yehed abaoe,
Ha n'o-devezo ket danvez braz ar pennher.

N'he-deus ket dizentet ; med he halon dener
A zo bet ken rannet ma ne bareo morse ;
Biken evid arhant ar galon ne werzer,
Pa vez ar garantez gwriennet en ene.

O ! perag on-eus bet en em welet eun deiz,
En em garet kement ? Perag on-eus bet feiz
Er blanedenn fallagr, e levenez an douar ?

Eviti me houlenn, o ! va Doue ! trugarez ;
Ro d'am muia-garet yehed 'vid chom e buhez,
Ha gra din-me mervel, en he leh, er glahar.

ANKEN

Klasket he-deus hirio kuzed he foan ouzin ;
N'on ket bet faziet ; a-boan he muzellou,
E-pad ma tivizem, a halle mousc'hoarzin,
Evel pep tra goeñvet o-doa kollet o liou.

Evel bokejou roz, digor diouz ar mintin,
Ken flamm c'hoaz gand ar gliz kouezet euz an Neñvou,
He divoh a oa ruz, hirio me 'gave din
O gweled dislivet, 'vel krinet gand ar riou.

He daoulagad ivez, a-raog, ken sklêr, ken glaz
Dindan ar sklêrijenn, pa zigorent ken braz !
A oa kalz teñvalloh, hanter-zigor hepken.

Evel-se, pa zonas eur griz an disparti,
Va halon baour, siwaz ! o kimiada diouti,
A flastras, en eun taol, dindan pouez an anken.

HE MARO SANTEL

Nozvez skrijuz-meurbed ma welis o vervel
Va Dous muia-garet,
Evel eur gwall huñvre, da zoñj a jomo pell
Em halon, gwriziennet

En despet d'an oll boan a gemere noz-deiz
Eur medisin dispar,
Evid galloud herzel oh ar hleñved direiz
Ha n'en-deus ket e bar.

Ar paz a yee war-gresk ; ar glañvourez, siwaz !
Gand he foan a glemme,
Ha me 'oa 'vel spontet, beuzet em glahar vraz,
E-harz troad he gwele.

Kekrent, en berralan, eur griadenn vouget
Da rei din an enkreiz,
Ha me da dostaad ar goulou, 'vid gweled
Hag hi 'oa c'hoaz e buhez.

He dremm a oa gwenn-kann ; ar hwezenn a ruille
Diouz he zal ivez gwenn ;`
Kerent ha mignoned da zaoulina neuze,
'Vid ober ar bedenn.

Med evel pa vijen, en eun taol, kouezet dall,
Kentoh eged soubla
Me da vond e kounnar ; c'hoant em-oa da grial
Kement ha da ouela.

Euz va gwalleur, siwaz ! e welen ar braster
Hag an deñvalijenn,
Rag euz va yaouankiz kement huñvreou kaer
A nije da viken.

Koll a reen peb fiziañs, pa deuas, en eur mare,
He zerzienn da vouga ;
A-raog eur barr-amzer e weler, evel-se,
Amzer zioul da gonta.

Kerkent, en eur daoler he daoulagad warnon,
E lavaras gand feiz :
« War-laez, er Baradoz, em-eus fiziañs, mignon,

D'en em weled eun deiz ! »

Neuze me deuas mezuz da veza selaouet
Ar vouez euz ar gounnar ;
Heb ar Relijion e soñjis n'ez eus ket
Netra vad war an douar.

Dihunet 'oa va feiz ; hag euz he chapeled
Me da ziskouez ar groaz
D'an hini¹⁵ neuze, gand karantez meurbed,
Pell amzer e pokas.

En eur zelled ouzin, hag ouz kroaz ar Zalver,
E varvas goustadig,
Laouen 'vel pa vije kousket hepken, seder,
Evel eur bugelig.

He chapelig ker, gand e groaz venniget,
A zo chomet ganen ;
Ra hallin, evelti, diouz Satan diwallet,
Mervel e gwir gristen.

¹⁵ D'an hini : "Da behini" er skrid orin.

WAR AN AOT

Eun nozvez euz Here war an aot 'oam azezet,
An noz a oa sioul-braz hag an neñv hep koabrenn,
An houl a oa didrouz, al loar, e-kreiz ar stered,
A lintre dreist or penn.

He dornig gwenn em dorn, hag he zal koant oh va skoaz,
E chomas eur pennad heb lavared eur ger ;
Evelti me a oa sioul, dirag eur galloud ken braz
Hag eun ober ken kaer.

Soñjal a reem, mantret, pegement evid an den
An Doue ken gallouduz en-deus bet madelez,
Da rei dezañ ene, da rei dezañ eul lodenn
Euz e werhted ivez.

Soñjal a reem, ohpenn, ne haller ket er bed-ma'
Kaoud eur galon dinamm evel ar vugale,
Ma n'eo ket gwriennet ar feiz en den, da genta,
Hag an doujañs e Doue.

Evel-se ni 'zahas, bepred, distag or halon
Diouz kement tech hudur a han euz ar youlou,
En em gared a reem, heb nehamant hag heb aon,
'Vel Êlez en Neñvou.

Euz kement soñjezon a jom euz va yaouankiz,
Te, nozvez kaer ha gwerh, a garan ar muia,
En eur zoñjal ennout, e teu va halon em hreiz
Da dridal c'hoaz brema'.

EUN ABARDAEZ A VIZ MAE

An abardaez a oa sioul ha kaer, e miz Mae ;
Soñj em-eus hirio c'hoaz : ne halle ket bale
E yeot berr an tevenn, en despet d'ar skoazell
A roe dezi va breh, evid galloud herzel.
Heb en em gaoud en aot e rankas azeza ;
Oh sklêrijenn al loar, dreist ar mor o para,
E welis war he dremm, 'vel liou gwenn ar maro,
He dornig, gwenn ivez, em dorn 'oa tomm-bero,
Euz he daoulagad 'oa ken truezuz ar zellou,
Ma kave din gweled, a-dreuz da va daelou,
Êl an dristidigez, a-boan deuet 'barz er bed,
O selled ouz eur bez digor en eur vered !
Evel diou steredenn he daoulagad 'oa sklear¹⁶,
Kement e lugernent oh sklêrijenn al loar ;
He dremm, en despet m'oa, gand ar hleñved, kastiz,
He-doa c'hoaz dalhet oll gened ar yaouankiz ;
Hi 'oa kaer evel-se, med he hened, siwaz !
A roe d'am halon baour eun anken brasoh c'hoaz,
En eru zoñjal ez een da goll eun teñzor ker,
Eur plah a zoujañs Doue, ken koant ha m'oa tener.
Ouz ar gwalleur neuze me glaskas enebi ;
Astenn a ris va breh, evdi diskouez dezi
Ar reier uhel, ar mor en nozvez-se ken kann
Gand sklêrijenn al loar hep koabr, hag en he hann.
Euz an amzer da zond me 'gredas komz dezi :
« Bremañ, p'oam deuet en oad, e halljem dimezi... »,
Med gand eur vouez klemmuz, hi da respont neuze :
« O ! petra, va mignon, a lavarez aze !
Gwel ar maro, siwaz ! 'zo war va daoulagad,
Ha me ken yaouank c'hoaz ! na pebez kalonad !
Ha gouzoud a rankin, war va lerh d'az lezel,
Da galon baour gouliet 'vel gand eun taol kontell !
Med dalh soñj, va mignon, n'om ket greet 'vid an douar,
Ar bed-mañ n'eo nemed eun draonienn a hlahar,
Na laosk ket a valloz p'em hasi d'ar vered,
Ped hepken, ro da Zoue da galon, da spered,
Me 'vo ganez atao, rag euz ar Baradoz
Ene da vignonez d'az frealzi deiz ha noz. »
D'ar homzou-ze, kerkent, koantig evel eun Êl,
Etrezeg ar stered hi da daoler eur zell.

¹⁶ sklear : "sklêr" (leoneg evid ar rim)

Abae, d'ar pardaez, pa'z an e ribl ar mor,
E kav din he gweled, he daoulagad digor,
O selled gand fiziañs etrezeg an Neñvou ;
E mouez an avelig e klevan a-wechou
Eur han ken dudiuz ha kan ar Baradoz,
Ha mouez va harantez oh va gervel en noz.

HE BOKED DIWEZA

O houzoud¹⁷ n'he-doa ket da veva pell amzer,
Eun devez euz Ebrel, va mignonez ken ker,
Gand eur vouez izelig, a gomzas evel-henn :
« Mignon, gwel pegement an heol a zo laouen,
Eur wech c'hoaz me garfe mond a-dreuz ar mêziou,
Evid galloud gwelloh selled ouz an Neñvou ;
Heol an nevez-amzer d'am halon a zo ken c'hwek ! »
Hag heb diviz muioh, hi, da ouela doureg,
Mond a rajem en hent, ha ni da gemered
Ar wenodenn guzet he-deus atao karet,
Rag en nevez-amzer 'oa leun a vokejou,
Leun a freskadurez hag a ganaouennou.
Kement tra 'oa chomet heñvel oh warlene,
Heñvel al letonenn, heñvel ar gwez er hae.
Mond a reem goustadig, rag kazi bep kammed,
Gand eur zell hir ha lemm, eh ehane bepred
Dirag kement bodenn, dirag kement gwezenn ;
Med evel pa vije deuet kerkent en he fenn
Eur zoñjezon bennag hag a oa gwall grevuz,
Evid klask he dalher gwelloh ouzin e kuz,
E lavaras : « Pignom eun nebeud er menez
Euz al leh ma welim, gand laouenedigez,
Ar gwenodennou sioul on-eus darempredet,
El leh m'on-eus touet atao d'en em gared,
Evid ma welim c'hoaz, ken skeduz ha ken koant,
Ster glemmuz an draonienn o lintra 'vel arhant. »
O ! nag he-divije karet, ar baourez klañv,
Kaoud neuze diouaskell, 'vel ar wennili skañv,
'Vid gweled, en eun taol, an oll mêziou-ze c'hoaz
Ar re¹⁸, d'an deiz war-lerh, ne welfe mui, siwaz !
O ! nag he-divije karet en-defe Doue
Roet ugent vloaz hirder, eviti, d'an deiz-se !
Med an deveziou kaer a zo re verr atao,
An heol a ziskenne, poent 'oa dond en distro ;
He halon rannet-oll, beuzet en he daelou,
E lavaras neuze kenavo d'ar mêziou.
Biskoaz, e-pad va buhez, n'em-eus bet em halon
Kemend a nehamant, kement e teue din aon
Da zoñjal er gwalleur a oa, 'vel eur hleze,
A-istribill en êr, dreistom, er mare-ze,
A-hed ar wenodenn e teujem war or hiz ;

¹⁷ O houzoud : fazi bet greet a-viskoaz. Levezon ar galleg.

¹⁸ Ar re : "Pere" er skrid orin.

Neuze me zastumas, e-touez ar yeot livriz¹⁹,
Bokejou gwenn an hañv ar re²⁰ war ziminal
He hambrig a werhez a lugerne gwechall,
Bokejou gwenn ar re²¹ 'lugerno war he bez,
Beb bloaz da viz Ebrel, e-pad ma vin e buhez.
Na kaerra bokejou ! kann en he dornig gwenn !
Med lenn a reas enno, moarvad, he flanedenn,
Eur pok a roas dezo, 'vel pa dlefent beza,
Euz a-berz he mignon, ar boked diweza !
Eur podig koant, gand dour, o dalhas pell amzer
En he hambr, gwenn ha fresk, ken livriz ha ken kaer,
Beteg ar mare kriz ma rankas o mestrez
Kimiada diouz an douar 'vid palez an Êlez.
Neuze pa n'o-doa mui dorn ebed d'o hempoenn,
E teujont, truezuz-oll, da blega sioul o fenn,
Hag evel o mestrez, ar bokejou, d'o zro,
A gouezas, goeñvet-oll gand alan ar maro.
Pep tra 'zo tremenet : bokejou, mignonez !
Abaoe, war an douar e vevan en enkreiz ;
Med chom a ra ganen eur mignon mad, ar feiz,
An hini²² 'ro fiziañs din d'he gweled eun deiz.

¹⁹ livriz : ? (evel al lèz livriz ?)

²⁰ ar re : "pere" er skrid orin.

²¹ ar re : "pere" er skrid orin.

²² An hini : "Pehini" er skrid orin.

HEH ANO

Va Dous muia-garet, va henta karantez,
'Oa ganet, eveldon, war ar mêz, e Breiz-Izel ;
En on diou lojennig n'oa nemed paourentez,
Med ne glaskem nemed frankiz 'vid on diouaskell
Ha laouenedigez.

Pa vije deuet Annaig er strêd gand he deñved,
E lavared dioustu : Pe n'eo ket pell ahano ;
Rag atao, war he lerh, me 'boulze va loened,
Ha bemdez, da guz-heol, ar mare 'vid an distro,
Me yee d'he darempred.

Nag a bed huñvre kaer a reem e-pad an deiz !
Pa vijem deuet en oad, ni deufe da zimezi ;
Hag or halon kerkent da lammed en or hreiz,
En eur zoñjal : pa vez kalz a garantez en ti,
Eur pinvidig a-leiz.

Eur zulvez, en eur hoad, e krohen eur wezenn
Em-oa skrivet don-braz ano va muia-garet ;
Soñjal a reen : eun deiz, Annaig, en eur dremen,
A welo, goude lenn an ano ganen skrivet,
Pegement he haren !

Siwaz ! Annaig a oa re gaer 'vid ar bed-ma' ;
Er baradoz he-deus eur gurunenn a werhez ;
Med va halon rannet, aliez, en eur ouela,
Evid lenn er wezenn ano kaer va harantez,
D'ar hoad ez an brema'.

AMZER DREMENET

Amzer gaer euz va yaouankiz,
Ne zistroi mui 'ta war da giz ?
Er glahar da viken
Pebez anken !

Gwaechall, gand va muia-garet,
Me 'blijje din kement ar bed !
Kared 'reen ar hoabr glaz
Hag ar mor braz.

On-daou, pa redem er hoajou,
En eur gana soniou, gwerziou,
Ne zoñjem ket kredi
En disparti.

Hogen an trubard, ar Maro,
A-dreñv-kein gand e falh a sko ;
Ar re wella, siwaz !
Aliez e laz.

Skoet en-deus, e-kreiz he hened,
Heb damant, va muia-garet ;
Perag on-me chomet
Heb beza skoet ?

Gwell eo ganen diskenn er bez,
Pa n'em-eus mui nep karantez,
Rag va Dous va gortoz
Er Baradoz.

TRISTIDIGEZ

Abardaeziou ken kaer a wechall, d'ar zuliou,
Pa'z eem, en eru huñvreal, a-dreuz ar prajou glaz,
Er gwenodennou sioul hag e-kreiz ar hoajou,
En eur zoñjal ennoh, va glahar a zo braz.

Dre druez, en em guzit dirazon, bokejou,
Hag ar gwel ahanoh hepken, bremañ, va glaz,
Lugernit 'vid an neb na skuill ket a zaelou,
Va lezit da ouela va mignonez, siwaz !

Heol skeduz, en em guz a-zindan eur goabrenn,
Grilled ha laboused, lezit ho kanaouenn,
P'em gweloh o tremen, va halon rannet-oll.

E-leh eun amzer gaer, e-leh al levenez,
D'am spered, d'am halon leun a dristidigez
E plij eun amzer du gand eun avel diroll.

AR GWIR VRO

E-barz er palez kaer el leh m'ema brema'
Ene va mignonez eüruz da viken,
Na me 'garfe galloud tañva, da vihanha,
Euz he levenez vraz eul lodennig hepken !

Med, siwaz ! kaer em-eus en em glemm ha gouela,
Chadennet e choman e prizon-kig an den,
Heb galloud d'am ene, skuiz gand buhez ar bed-ma',
Digeri braz an nor a gas d'ar sklêrijenn.

O ! perag ne deu ket an devez-se kentoh,
Devez kaer ar maro, da zegas din ar peoh
Hag an eürusted, e bro va harantez ?

E bed ar verzerien, ya, paour-kêz emzivad,
Te 'gollo da viken anken ha kalonad,
D'az klahar a vezo²³ distroet e levenez.

²³ a vezo : ? Maretze " e vezi".

DILEZET

O ! na pebez anken ! pebez merzerenti !
Tostaad 'ra miz Mae, kement tra 'zo laouen,
Hag e-kreiz ar gwalleur, soñjal ne hallin mui
Kana war va zelenn !

Gouzoud e red, ken tomm, gwad yaouank em gwazied,
Eo va halon dener, ken troet d'ar garantez,
Ha rankoud, enkrezet, gweled e-barz er bed
Kemend a levenez !

Anaoud ar blijadur, taoler eur zell c'hoantuz
War an neb a dremen eüruz em hichenn,
Ha n'eus forz e pe leh rankoud dalher, e kuz,
Va glahar oh peb den !

E peb leh, hag atao, gand an oll dilezet,
Heb eru ger, heb eun dorn da rei din eur berad
Euz ar gwir garantez heb an hini²⁴, bepred,
Em-bezo kalonad !

Evel gand an derzienn em empenn ez eus tan,
Ar hwezenn euz va zal a gouez a-veradou,
Êz e kavan harpa va fenn paour oh eur mean²⁵,
A bep tu d'an hentchou.

O ! ma n'em-befe ket, Jezuz, aze da groaz,
Pa welan en-dro din mignoned ken didruez,
Daoust ha me, lavar din, a hallfe kaoud, siwaz !
Kalon da jom e buhez ?

²⁴ an hini : "pehini" er skrid orin.

²⁵ eur mean : eur mên. Stumm Leon, evid ar rim.

D'HEH ENE

Al laboused o-deus achuet o hanaouenn,
Kousket int en neziou ;
Ar pardaez a zo klouar, kaer eo mond da bourmen,
Eur pennad, er mêziou.

Med pardaez ar zul-mañ n'eo ket heñvel, siwaz !
Oh re warlene,
Hag an dristidigez a ziskenn gwasoh-gwaz
Em halon, em Ene.

O te va mignonez, an hini²⁶ 'ouie kared
Evel eur bugelig,
'Vid frealzi da vignon, perag ne hallez ket
Diskenn eur pennadig ?

'Vid lavared din peur e tilezin an douar,
Evid eur bed gwelloh ?
Rag biken, a welan, em zraonienn a hlahar
Ne hallin kaoud ar peoh.

O ! perag euz an Neñv ne deuez ket, en noz ma',
Da derri va jadenn ?
War diouaskell eun Êl, ganez, en eur gana,
Eüruz e yafen !

²⁶ an hini : "pehini" er skrid orin.

VA-UNAN

Deveziou kaer an hañv, evel gwechall adarre,
A laka levenez er galon, er mêziou,
Ha koulskoude, siwaz ! me 'ranko, da bep beure,
Atao skuilla daelou.

Rag n'he gwelin ket mui, prim ha gae 'vel eul labous,
O vond e-kreiz an heol, a-dreuz ar yeot tener ;
E kornig ar vered eo kousket bremañ, didrouz,
Va mignonez ken ker !

Ne hallin mui bremañ tañva plijadur ebed,
Kalon ha daoulagad 'zo maro 'vid an douar ;
Mond a ran d'ar vered, evel eun den dilezet,
Da guzad va glahar.

Ya, mond a ran aliez war he bez da zaoulina,
Abalamour n'eus ket en-dro din eur mignon
Hag a deufe, dre druez, eur mare da vihanna,
Da frealzi va halon.

Ral e soñjer, siwaz ! pa vezer el levenez,
E gwalleur an dud all, en o foaniou skrijuz ;
Mignoned, koulskoude ra vezo c'hwek-oll ho puhez,
Ra vezoh eüruz.

D'AN DUD HEP KREDENN

C'hwi ar re²⁷ n'ehanit, e peb leh, da grial
Ne vezo ket eun deiz, evidom, eur vuhez all,
Ma n'eus ket 'vid an den na Krouer nag Ene,
Er gwalleur petra ve da gredi 'ta neuze ?
Evel don m'ho-pije, war hent kriz ar vered,
Heuliet ho mignonez skoet e-kreiz he hened,
Ha ma m'ho-pije ket kavet hepken unan
Evid kemered perz, eun nebeud, en ho poan,
A ! daoust ha c'hwi neuze n'ho-pije ket karet
Kaoud eur gredenn bennag 'vid ho kalon rannet ?
Med komzom gand frankiz hag heb mond e kounnar :
Lakom ne vijeh ket bet biskoaz er glahar ;
Daoust ha mad e rafeh, e-keñver ho nesa,
O hoapaad ar feiz a ra dezañ beva,
En despet d'ar gwalleur a deu, ken gwaz, d'hen skei,
Ma ne oar mui, siwaz ! e pe leh en em drei ?
E leh ar gredenn-ze an hini²⁸ 'ro dezañ
Eun nebeudig kalon 'vid herzel oh e boan,
Petra rofeh, mar plij ? Ho prezegenn houlllo ?
C'hwi 'lavar eo pep tra kollet, eur wech maro :
Va mignonez ivez ! fiziañs ebed eta !
Gwelloc'h 'ta, pe kerkoulz, 've mond d'en em grouga ?
Nann, nann, tud hep kredenn, pa vezer er glahar,
Pa ne vez mui netra da hedall war an douar,
N'eo ket diganeoh eo mond da glask skoazell ;
Evid kaoud nerz-kalon er boan, beteg mervel,
Evid galloud gweled va mignonez eun deiz,
Me 'dle, 'vel eur hristen, dalher atao d'ar feiz.

²⁷ ar re : "pere" er skrid orin.

²⁸ an hini : "pehini" er skrid orin.

ER VERED

E kornig ar vered, euz al leh ma weler
Ar mor oh eonenna tro-war-dro d'ar reier,
El leh ma par an heol, adaleg ar beure,
 War douar ar re varo,
 Da hedal ar mare
Ma savint, en eun taol, euz a varo da veo,
E-skeud ar bokejou goloet oll a wenan,
Er bez war an hini²⁹ n'eus ket lakaet eur mean³⁰,

 Euz he housk diweza
 E kousk va harantez,
 Ar genta mignonez
 Em-eus bet er bed-ma'.
 En eur lenn war he hroaz
 Eun oad hag eun ano,
 Unan, ken berr, siwaz !
 Hag egile, ken brao !

Va halon baour a rann, rag anezi, bepred,
Ar zoñjezon dener a deu 'barz em spered,
Ha biken ne varvo, keid ma hallin dalher
Er bed-mañ, gand ar vuhez, eun dra bennag a ger.
Ya, keit ha ma vevin, e welin em hichenn,
E-tal aot an Arvor, e yeot berr an tevenn,
Va henta karantez d'an hini³¹, siwaz !
E lavaren neuze, p'oam ken eüruz c'hoaz :
« Ya, te 'vezo va fried, mignonez, bez heb aon,
Lak da zorn em hini, da dal war va halon,
Ya, me 'dou dirazout, dirag Krouer pep tra,
Eo te, goude va Doue, va haranetz vrasa. »
Hag hi, leun a fiziañs, a responte neuze :
« Va mignon, me d'az kred, pa'z eo gwir dirag Doue
E touëz d'am hared, evel ma kar eur pried,
Gand eur galon atao distag diouz pep pehed,
Gand eur galon a dro d'ar mad, d'ar feiz hepken,
E-kreiz al levenez 'vel e-kreiz an anken. »

.....
Gwelit diou goulmig wenn, eun devez kaer a Vae,
O hournijal en êr, ken seder ha ken gae !
A-hed kement traonienn, a-uz kement menez ;
E-pad ma hournijont, e-kreiz al levenez,
Ne ouoznt ket ez esu eur chaseer digalon

²⁹ an hini : "pehini" er skrid prin.

³⁰ eur mean : eur mên (stumm Leon evid ar rim).

³¹ d'an hini : "da behini" er skrid orin.

Oh o gedal, du-hont, e-kichenn eur hoad don.
Hebdale trouz eun tenn a glever en hekleo ;
Ar barez 'zo tizet gand taol kriz ar maro ;
He halonig, siwaz ! gand ar plom 'zo draillet,
Hag he lagad ken lemm, kerkent, a zo klozet ;
He gouzoug bremañ laosk, a-istribill he fenn,
He diouaskell ivez, euz an Neñv o tiskenn
Evid koueza d'an douar, beuzet-oll gand he gwad,
He buhez kaer, da viken, eet en eun huanad.
Spontet oll, he mignon, er hoad a zo nijet,
Heb gouzoud mui, siwaz ! peleh en em guzed,
Hag en oz e klever en draonienn, er menez,
Klemmou truezuz ar par, o ouela d'e barez.

.....
Ni 'oa ken eüruz on-daou d'en em gared,
Da zoñjal e vijem, eun devez, dimezet,
Eur fiziañs vraz, ohpenn on-oa da veva koz,
Ma kavem ar bed-mañ kaer 'vel eur Baradoz.

Ar gwez uhel, er hoajou,
Goloet-oll a zeliou,
A-dreuz yeot ar prajou
Hirvoud an dourouigou.

Gand sklêrijenn an heol an houlennoù gwenn-kann,
Mouez al labous er harz ha kan ar grill el lann,
En eru ger, kement tra : kan, hirvoud, sklêrijenn,
A frealzo va halon, ya, kement, ma rofen
Kant vloaz buhez, 'vel homañ, 'vid eur bloaz, 'vid eur miz
Da dremen c'hoaz ganti, 'vel en or yaouankiz.
Setu perag, siwaz ! daoulinet war eur bez,
Evel ar goulmig wenn me ouel va harantez,
E kornig ar vered, euz al leh ma weler
Ar mor oh eonenna tro-war-dro d'ar reier,
El leh ma par an heol, adaleg ar beure,
War douar ar re varo,
Da hedal ar maro
Ma savint, en eun taol, ezua varo da veo.

LIREUENN HE BEZ

Pevarzeg vloaz a zo m'he-deus va mignonez
Kimiadet diouz an douar 'vid palez an Êlez.
War he bez, 'vel beb bloaz, da zevez he maro,
Gand eur galon rannet e taoulinan hirio,
E-skeud al lireuenn em-oa lakaet en douar ;
Bihanig 'oa neuze, bremañ brankou dispar,
War eun troad uhel ha teo, 'zo goloet a zeliou
Ar re³² 'zo kurunet, koantig, a vokejou.
Adaleg ar mintin, gwenan euz tro-war-dro
A zun, dindan an heol, ar mel c'hwek anezo.
M'eo kaer al lireuenn, ma kresk buan ha nerzuz,
Eo dre va harantez, dre m'on bet aketuz
D'he hampenn, heb ehan, evel 'vid he bugel
Eur vamm vad ha tener a gempenn ar havell.
Koulskoude m'eo ken kaer, n'eo ket hepken va foan
Ha va harantez vraz 'zo kirieg, a gredan,
Red 'oa dezi beza dispar, al lireuenn,
Rag e kalon Annaig he-deus greet he gwrizienn.

³² Ar re : "Pere" er skrid orin.

GOUDE VA MARO

Annaig, em buhez em-eus gouelet puill da varo,
Koulskoude, pa zoñjan, perag e vijes beo ?
Ar bed-mañ n'eo nemed eun draonienn a hlahar ;
Te 'oa ken yaouankig o tilezel an douar,
Ma n'eh-eus ket gallet anaoud ar ranngalon
En-deus kement, siwaz ! merzeriet da vignon.
Pa zoñjan muioh c'hoaz, me 'drugareka Doue
Da veza roet abred baradoz d'az ene,
Rag, dre ma teuan en oad, e welan 'oa gevier
Huñvreou va yaouankiz ar re³³ 'gaven ken kaer !
Ya, kement on e poan, ma teu mall din, d'am zro,
Lavared da viken d'an douar kenavezo.
Er bed-mañ n'em-eus mui nemed eul levenez :
Kempenn al lireuenn a ro disheol d'az pez,
Med va halon a rann o soñjal e vezo
Lezet oll a-ziaskren goude ma vin maro.
Den da houde ne deuy war da bez da bedi ;
Al lireuenn 'vo seh, d'az pez a-zindanni,
Gand eun touller beziou neuze 'vo digoret
Eskern all gand da re, moarvad, 'vezo mesket,
Hag a-benn eur mare ne vezo mui gouezet
E pe leh er vered Annaig a oa beziet.
O ! nag e tle beza trubuilluz kement-se
Evid kement hini na gred ket en ene !
Med ar Zalver en-deus disklêriet d'ar hristen :
« Ar bed a dremeno, te 'vevo da viken ! »

³³ ar re : "pere" er skrid orin.

D'AM ZELENN

A-boan m'oa diskennet va mignonez en douar,
Ma tirollas warnon noz teñval an enkreuz,
Rag den ne gemere perz e-barz va glahar,
Den ouzin n'en-doa truez.

Ma'z eo doaniuz gweled, da beb diskar-amzer,
An delienn o tiskenn, ar vleunenn o hoañvi,
Goude beza soñjet, prestig e lavarar :
Ne hallent beza mui.

Med me, ken yaouank c'hoaz, bleunenn hanter-zigor,
Beza gand ar gwalleur war va zreid dizehet,
Taolet ha distaolet, evel war eur gwall vor
Eur vag hep stur ebed.

Koll a reen peb fiziañs, pa glevis o sevel
Euz an deñvalijenn eur vouez vadelezuz,
Skiltr evel an avel, kaer evel mouez eun Êl,
En eur ger, dudiuz.

Ar vouez a lavare : « Perag kement gouela,
Ha perag er gwalleur plega kement da benn ?
Ganez eur vignonez a jom c'hoaz er bed-ma' :
Honnez eo da delenn. »

Ha d'ar vouez-se, kerkent, va halon da dridal,
Dirag va daoulagad an heol a lugerne,
Bez' e oan 'vel eun den skoet gand eun huñvre fall,
Pa zihun er gwele.

O ! va zelenn ken ker ! o va brasa teñzor !
Nag a zeveziou kaer a dlean dit em buhez !
Daoust ha ped a frealzi c'hoaz war douar an Arvor,
Goude ma vin er bez ?

